

62

CHANSON

POTRET PLOUILLAU

Var ton : Adieu, Pontreo



M'am bize speret da gompren, evel a meus fantazi,
Me a vije n'en impliet da zonet da gomposi
Eurec'himiad leun a c'hlac'har, gret da gonscrivet yaouanq
O deus tennet ar billet ebars er blaves brezaut.

Ebars er bla mil eis caut c'hoec'h, bemp a vis guengolo
E zeo digueet adare eus a baros Plouillau
Tud yaouanq evit an arme, tud deus an derrupla :
Glac'haret eo oll ligne p'o guelont o partia.

Da bartia gant an actif ne zeus quen nemet pevar ;
Ervoanic Jacob, eus ar bourg, ha Guiljan Ar Melebar ;
Ha Yannic Prat, eus ar Goajou, ha Pipi an Aveant ;
Pevar den eus ar vrava, corfou caer barud vaillant.

Ervoanic Jacob a lare en deiz ze d'he gamarad :
Eman a zo eun devez trist hac a ra din calonad !
Guelet ma mam baour o vouela, ha va zad qes desolet
Va c'halonic ebars em c'hreiz so dija casi rannet.

Calz a sonchfe de, marteze penos e vent eur poulltron
Em be aoun rac eun ten fuzul ! pe rac eur voulet canon
P'otramant aoun rac ar fatiq o vale dre an hentchou,
Pe gousquet var eur guelet can ebars er c'hordegardou.

Dougen va dillat var va chouq, va fuzuil ha va zabren,
Bale bembe a guer dargner dre a fanq hac vouillen
Ha goude e fin va beac'h rencout marteze campi,
Pe gousquet var an douar ien pe otramant bivoiqi.

Torodeus an nepa sonch se : ma c'haljent leun em c'halon
Evit guelet va bolonte ha va inclination,
Ma na fofte nemet va goad, me en scuilfe tout joaüs
Evit souten hon Impalaër, eun tad quer carentezus !

Piou na gombatte quiet gant eur Impalaër christen ;
Eur gaus quer just hag e hini zo facil da zouten,
Pa somp mempreu da Jesus Ghris, soudardet an Aviel
Bugale da Zoue au Tad, Tamplau da Speret-Santel,

Arça eta, camaradet quen quitaad euz or chontre
Demp ni da ilis Plouillau da supplia hon Doue
D'hor preservi demeus goal chans pa vezimp en armeou
Ha da gonsoli bars er guer gon tadou hag hon mamou.

Adieu dec'h, Autro San Millau, patron euz ar barous-ma
Adieu querent ha mignonet cessit breman da vouela
Pedit Doue hac ar Verc'hez da gavet soign ac'hanomp,
Hac bou Ael mad d'hon chondua partout elec'hou a zefomp.

Adieu, va mab, va esperans, eme o tad desolet ;
Piou a gonsolo oa dud paour goude ma vi partiet ?
Pa vin accablet gand cozni, me vo clevet o laret :
Ma vije ma mab quez er guer en dije va soulaguët.

Clevit ar vam o kimiad ive digant he buguel :
Deus a na c'hoas ma boqin eur vech quent eguent mervel
Aben ma retourni dar guer me vo ed euz a bed-ma,
Deus aman etre vadivrec'h evit ar vœch diveza.

A Guichenen ar momet fatal ma c'heus lennet d'ar billet
Beb noz vel ma fo di cousquet me a seblant da velet
O tont eus eur gombat sanglant var eur chario blessët,
Pe tolet en eur hospital, gand ar oll abandonnet.

Ar zoudard youanc coustristet c'hoas quen eguet partia
Evit essato c'honsoli a lavar en eur vouela :
Tavit va zad ha va vam baour, ha bevit en esperans,
Doue, tad ar visericord, a zo bras e brovidans.

Goude ma vo fin d'ar brezel ha goneet ar victoar,
Gras Doue hag ar Verc'hez, e vezo fin do glahar,
Evit merq eus hon vaillantis, gand lore deus hon tocou
Ni a zistroyo prest d'ar guer evit sec'hi o taëlou.

Adieu da baros Plouillau ha de oll habitant
Aieu d'hon oll anaoudeguez, ha querent ha mignonet,
Ha ma na memp quiet ar bonheur er bet ma d'ennem velet
Gras deomp ebats er Barados assembles d'en em gavet.

Tous droits réservés :

GUILLERMIC.